

(59)

## KAN-MARO

### ITRON MANER AR GENKIZ, (1)

EUZ A BARREZ NIZON,

E KERNE,

Maro ar 16. a viz Gouere 1847.



War don: *Bosen Elliant.*

Allaz! allaz! maro Itron  
Maner ar Genkiz-e-Nizon  
A zo evel ar c'houmoul du  
A guz ann heol a bep tu.

Hor mammik baour, pa n'em oc'h mui,  
Piou dorro pelloc'h hon naon-ni?  
Piou roi d'e-omp diplat ha louzou?  
Piou a bareo hor gouliou?

(1) Madame de la Villemarqué, mère de l'auteur du *Barzaz-Breiz*.

Adal ar ger a Gemperle  
Bete Nizon, ann deiz a oe,  
E bordig ann hent daoulinef,  
Hed peder leo hon, euz gwelet;

Gwelet hon euz da heul ar c'harr  
Zo bet ouz ho kas d'ann douar ;  
Gwelet hon euz etal ho pez,  
Gwela raimp epad hor buez.

Dioueret, siouaz, er maner ;  
Dioueret er vro, Itron ger !  
Kenavo, hor mamm dous ha mad ,  
Perag oc'h-hu deut d'hor c'huitat ?

— Peorien, peorien geiz, ho taelou  
Zo dreist ann holl meuleudiou,  
Kouskoude ne ket red gwela  
Pe'ma hor mamm ebarz ar joa ;

Pe'ma gand ar Werc'hez zantel,  
Gant Jezuz hag ann Ebrestel,  
Gand ar Zent hag ar Zentezed,  
Gand he diou verc'h, gant he fried.

Ar beleg etal he gweie,  
Gand eur vouez dous e lavare :  
*Sent ha Sentezed euz ann ee,*  
*Daut da zigemer ma ene ;*

*Deut ta ; ma hellinn evid mad  
Karout gan-e-hoc'h Doue hon tad,  
Er Baradoz da virvikenn.  
Neuze e teuaz da dremen.*

Tremen e deuz gret gant dousder,  
Evel o c'hoarzin, a lerer,  
Evel m'e dese gwelet dor  
Ar Baradoz d'ezhi digor.

*Edo gouel Maria-Garmel,  
Gouel dudiuz evit mervel !  
Edo abardez ar gwener,  
Deiz braz ma varvaz hor Salver.*

Tavit 'ta, peorien geiz, tavit ;  
Na welit ket, mar he c'harit ;  
Mad da vedi a oa ann ed,  
Ann elez ho deuz hen medet.

*Ar wezen goz a zo pilet,  
He dra gand ar Mestr a zo et,  
Kouskoude kalz a blant iaouank  
A chom war he lerc'h stank-ha-stank.*

*Ann einedigou hallo c'hoaz  
Neisia dindan ho deliou glaz,  
Ha kana meuleudi Doue  
Na losk ein na den dibourve.*

Leveromp ann *De Profundis*  
Etal bez Itron ar Genkiz,  
Ha ra vo skrivet war he men :  
AMAN EMA MAMM AR BEORIEN.

Ar werz zo gret gand eur belek,  
Bet kure e parrez Riek,  
Pehini gare ha garo  
Da vikenn ann itron varo.

Endra ma chomo e buez,  
E lavaro peb mintinvez  
Eur *Memento* 'vid he vamm goz,  
Ma-'z-ai d'he c'haout d'ar Baradoz.

L'abbé Stanguennec  
(cf. Barran-Bruiz.)

